

## Tud ar vro - Bro Leon

### Roll kanaouennoù – Ronds et rondes simples

#### ‘N eur vont d’ar feunteun d’ar goudour

‘N ur vont d’ar feunteun d’ar goudour  
O la violette tra la la  
‘N ur vont d’ar feunteun d’ar goudour  
D’ar feunteun ar Bodaleg  
D’ar feunteun ar Bodaleg, o ge  
D’ar feunteun ar Bodaleg.

Me a rankontras va dous,  
O la violette tra la la  
Me a rankontras va dous  
Hag eñ gwisket e skarleg  
Hag eñ gwisket e skarleg, o ge  
Hag eñ gwisket e skarleg.

Hag eñ kregi en dourn  
O la violette tra la la  
Hag eñ kregi en dourn  
Em jacha er valaneg  
Em jacha er valaneg, o ge  
Em jacha er valaneg.

Hag hen delc’her eno  
O la violette tra la la  
Hag hen delc’her eno  
Ken a oa savet ar stered  
Ken a oa savet ar stered, o ge  
Ken a oa savet ar stered.

Va lezit da vont d’ar gêr  
O la violette tra la la  
Va lezit da vont d’ar gêr  
Emberr me ‘vo skandalet  
Emberr me ‘vo skandalet, o ge  
Emberr me ‘vo skandalet.

Me am eus ur gwall lezvamm  
O la violette tra la la  
Me am eus ur gwall lezvamm  
Ar wasa ‘zo bet ganet  
Ar wasa ‘zo bet ganet, o ge  
Ar wasa ‘zo bet ganet.

Livirit d’ho kwall lezvamm  
O la violette tra la la  
Livirit d’ho kwall lezvamm  
Ar feunteun a oa bet troublet  
Ar feunteun a oa bet troublet, o ge  
Ar feunteun a oa bet troublet.

Hag an den, un denjentil  
O la violette tra la la  
Hag an den, un denjentil  
O tizrei deus an Naoned  
O tizrei deus an Naoned, o ge  
O tizrei deus an Naoned.

E Naoned er marc’had  
O la violette tra la la  
E Naoned er marc’had  
En doa choazet bizaoued  
O choazet bizaoued, o ge  
O choazet bizaoued.

Bizaoued alaouret  
O la violette tra la la  
Bizaoued alaouret  
Pa gomzer diouz an eured  
Pa gomzer diouz an eured, o ge  
Pa gomzer diouz an eured.

Eureujomp ni hon daou  
O la violette tra la la  
Eureujomp ni hon daou  
Dont da zelv’her menajenn  
Dont da zelv’her menajenn, o ge  
Dont da zelv’her menajenn.

Menajenn ha comme il faut  
O la violette tra la la  
Menajenn ha comme il faut  
An neb a rey a gavo.  
An neb a rey a gavo, o ge  
An neb a rey a gavo.

An hini a labouro  
O la violette tra la la  
An hini a labouro  
En dezo ed ha kolo  
En dezo ed ha kolo, o ge  
En dezo ed ha kolo.

An hini ne rey netra  
O la violette tra la la  
An hini ne rey netra  
N’en dezo ket a vara.  
N’en dezo ket a vara.  
N’en dezo ket a vara.